

GWERZ SANT TREMEUR
(Gwirliskin e Bro Dreger)

8N2-1-036
Guerlesquin
Ain = Genovefa?

*Dans le Trégor, au centre de l'Argoad,
A Gwirliskin, la joie est grande !
De voir, nouvellement relevée,
La chapelle St Tremeur, si célèbre.*

-1- E Bro-Dreger, 'kreiz an Argoad,
E Gwirliskin eo bras ar stad !
O welout, nevez adsavet
Chapel Sant tremeur, ken brudet.

*Refrain :
Monsieur St Tremeur, nous vous prions :
Protégez la Bretagne, notre chère patrie.
Et conduisez sur les chemins de Dieu
Les Guerlesquinois, vos enfants !*

DISKAN :

Aotrou Sant Tremeur, ni ho ped :
Diwallit Breizh, hor bro garet !
Ha renit war hentoù Doue,
Gwirliskiniz ho pugale !

*Dans une très jolie petite vallée
Une belle chapelle s'élève.
L'eau s'écoule parmi la verdure
Les grâces aussi sûrement !*

-2- En un draoniennig koant meurbet
Ur chapel gaer a zo savet.
An dour a red 'mesk ar glazur,
Ar c'hrasoù ivez a dra-sur !

*Autrefois nos Pères, les Celtes,
Avaient ici leur sanctuaire,
Pour honorer leurs Dieux,
Leur offrir leurs sacrifices.*

-3- Gwechall hon tadoù, ar Gelted !
O doa el lec'h-mañ o neved,
'Vit enoriñ o doueoù,
'Kinnig dezho o aberzhoù.

*Longtemps après, les saints de notre pays,
Annoncèrent le vrai Dieu.
La Bonne Nouvelle était publiée
Sans trêve ni repos.*

-4- Holl sent hor Bro, pell goude-se,
A gemennas ar gwir Doue.
Ar c'heloù-Mat oa embannet
Hep diskuizh, nag ehan ebet.

*Faire pénitence et prier,
Montrer à chacun le bon exemple.
Etre vrais témoins de l'Amour
Révélé pour nous par le Fils de Dieu.*

-5- Ober pinijenn ha pediñ,
Diskouez skouer vat da bep hini.
Bezañ gwir dest d'ar Garantez
Diskuliet dimp gant Mab Doue.

*Menant une vie si sainte
Ils firent triompher l'Evangile.
Que soient loués nos vieux Saints,
Pour leurs oeuvres, mille mercis.*


-6- 'N ur ren ur vuhez ken santel
Ganto 'trec'has an Aviel.
Ra vezo meulet hor Sent kozh,
'Vit o oberoù, mil bennozh !

*Parmi eux se trouve St Gweltaz (Gildas),
Plein de science, grand prédicateur.
Les vallées résonnaient
Du tonnerre de sa voix, quand il parlait !*

-7- En o zouez emañ Sant Weltaz,
Leun a skiant, prezeger bras.
An traoniennoù a zistone
Gant kurun e vouezh, pa gomze !

*En ce temps-là, au sixième siècle,
La Domnonée était opprimée,
Sous Konomor, le roi,
Grand criminel, homme sans pitié !*

-8- D'ar c'houlz-se, er c'hwec'hvet kantvet
Domnonea oa gwall wasket,
Dindan Konomor ar Roue.
Tortfedour bras, den didruez !



*Au milieu d'un bois, en Haute-Cornouaille,
Konomor vivait dans son château.
Voulant, sans égards ni scrupules,
Mettre la main sur le Pays Vannetais.*

*Mais à Gwened (Vannes), Warok le Comte,
N'y trouvait sûrement pas son compte.
Et Konomor de lui demander
De se marier avec sa fille Trifina.*

*Mais, Warok avant d'accepter,
Demande l'avis de Gweltaz.
Celui-ci répond que ce mariage est ce qu'il
y a de mieux pour préserver la paix !*

*Au début tout marchait très bien
Entre les deux époux.
Mais vite, les nuages se levèrent,
Et obscurcirent l'horizon.*

*Voici Konomor repris
Par l'envie de posséder Gwened,
Et pour faire plier le Comte,
Il lui tua sa fille !*

*Le père affligé, courut
Aussitôt trouver Gweltaz :
Celui-ci appelle la puissance de Dieu,
Trifina se lève, à nouveau vivante !*

*Quelques mois après cela,
Un enfant vit le jour :
Elle le nomma Gweltaz-La- Grande-Victoire
Devenu notre St Tremeur.*

*Comme il fut et sera :
La force de la vie vainc la mort,
Comme toujours la lumière
Sera victorieuse des ténèbres !*

*Et l'enfant grandit
En sagesse autant qu'en âge ;
Et un jour sa mère le conduisit
A l'Abbaye de Ruiz avec St Gweltaz.*

*En l'Abbaye nouvellement bâtie,
Il y avait un collège renommé.
St Gweltaz le dirigeait,
Possédant les vertus de la vraie foi.*

*Conduit par un maître si saint,
L'enfant grandit dans la foi ;
En son intelligence, la sagesse de Dieu,
En son cœur, son amour,*

-9- 'Kreiz ur c'hoad, e Kernev-Uhel,
Konomor 'veve 'n e gastell.
C'hoant dezhañ, hep bri na morc'hed
Lakaat e zorn war Vro-Wened.

-10- Met e Gwened, Warok ar C'hont,
Sur mat ne gave ket e gont.
Ha Konomor da c'houl gantañ,
Dimeziñ d'e verc'h Trifina.

-11- Hogen, Warok, kent asentiñ,
Gant Gweltaz a c'houlenn ali.
Hemañ 'respont eo c'hoazh gwelloc'h
An dimez, ha mirout ar peoc'h !

-12- 'Tre an daou bried, da gentañ
E kerzhe an traoù, mat kenañ.
Met ar c'houmoul, prim da sevel,
Ha da deñvalaat an dremmwell.

-13- Setu Konomor adtapet
Gant ar c'hoant da gaout Gwened,
Ha 'vit ober d'ar C'hont plegañ
Eñ da lazhañ e verc'h dezhañ !

-14- An tad ankeniet a redas
Dizale da gaout Gweltaz :
Hemañ da c'halv galloud Doue,
Trifina 'sav, bev adarre !


-15- Un nebeut mizioù goude se,
Ur bugel a welas an deiz :
Anvet ganti Gweltaz Trec'h-Meur,
Deuet da vezañ hon Sant Tremeur.

-16- Evel ma oa bet, hag a vo :
Nerzh ar vuhez 'trec'h d'ar marv.
Evel dalc'hmat ar skerijenn
A vo trec'h d'an deñvalijenn !

-17- Hag ar bugel da vrasaat
Er furnez kenkoulz hag en oad ;
Hag un deiz e vamm e gasas
D'Abati Ruiz gant Sant Weltaz.

-18- En Abati nevez savet
'Oa ur skolaj dre-holl brudet.
Sant Weltaz eno a rene,
Ennañ briwer c'hioù ar wir feiz.

-19- Bleniet gant ur mestr ken santel,
Er feiz e kreskaas ar bugel ;
En e spered, furnez Doue,
En e galon, E garantez.



*Tremeur à l'école, alors sa mère,
Afin de bien servir Dieu,
Et trouver le vrai bonheur,
Se retira loin du monde.*

*La meilleure éducation,
Piété et littérature,
Étaient données dans l'Abbaye
Au saint et à tous les élèves.*

*Celui-ci, rempli de vertus,
Semblable à Jésus, Notre Seigneur,
Mène une si sainte vie
Que celui qui le voit, voit un ange.*

*Dieu fait à travers lui
Les plus beaux des miracles :
Le sourd entend, l'aveugle voit,
Dieu guérit par l'enfant !*

*Avec des adolescents de même âge
Il aimait jouer à la soule,
Mais un jour pendant une partie,
La mort vint sur le terrain.*

*Konomor, le roi criminel,
Cherchait depuis longtemps
Après son fils afin de le tuer,
Sitôt qu'il mettrait la main sur lui.*

*Et quand il vit le pur enfant
Tendre et doux comme un agneau,
Il dégaina aussitôt son épée,
D'un coup, il le décapita !*

*Ô, Konomor, père maudit,
Pourquoi as-tu tué ton fils ?
Car une prédiction disait :
« Tremeur te prendrait ton trône ».*

*Ton fils Tremeur est dans la gloire
Avec tous ceux qui ont eu leur part
De souffrances sur cette terre,
De bonheur sans fin maintenant.*

*Il est parmi les martyrs
Qui ont lutté jusqu'à la fin,
Et souffert en tout temps
Au nom de Jésus, Notre Seigneur.*

*Voilà pourquoi les Bretons
L'ont toujours honoré.
En maints endroits, une statue
Le montre portant sa tête.*

-20- Tremeur er skol, e vamm neuze,
Evit servijiñ mat Doue,
Ha kavout ar gwir eürusted,
En em dennas pell diouzh ar bed.

-21- Ar gwellañ kelennadurezh,
Doujañs-Doue ha lennegezh,
A voe roet en abati
D'ar sant ha d'an holl skolidi.

-22- Hemañ, karget a vriwerc'hioù,
Heñvel da Jezuz, hon Aotrou,
A gas ur vuhez ken santel :
An neb e wel, a wel un ael !

-23- Burzhudoù eus ar re gacrañ
A ra Doue dre anezhañ :
Ar bouzar 'glev, an dall a wel,
Doue 'bare, dre ar bugel !

-24- Gant krennarded e memes oad
En em blije c'hoari mellad,
Met un deiz 'pad un abadenn
'Teuas ar marv en dachenn

-25- Konomor, ar roue muntre,
A glaske abaoe pell-amzer
War-lerc'h e vab 'vit e lazhañ,
'Dal ma lakfe e zorn warnañ.


-26- Ha pa welas ar bugel glan
Tener ha dous e-giz un oan,
E gleze diouzhtu 'zic'houinas,
En un taol, e vab 'tibennas !

-27- A, Konomor, tad milliget,
Perak da vab ac'h eus lazhet ?
Rak un diougan a lavare :
« Da dron, Tremeur a gemerfe ».

-28- Da vab Tremeur a zo er c'hlod
Gant ar re o deus bet o lod
A c'houzañv, war an douar-mañ,
A eürusted hep fin bremañ.

-29- Emañ e-touez ar verzherien
O deus stourmet betek ar penn,
Ha gouzañvet e pep amzer
En anv Jezuz, Hor Salver

-30- Setu perak ar Vretoned
Atav o deus eñ enoret.
E meur a lec'hioù, un delwenn
Hen ziskouez o tougen e benn.



*Il y a longtemps, dans la paroisse de Gwerliskin
Au-dessus de la fontaine qui chante joyeusement,
En ce site, depuis toujours sacré,
Une belle chapelle avait été érigée.*

*Tous venaient y prier
Le saint qu'ils aimaient le plus.
Ici les grâces s'écoulaient,
Comme coule l'eau dans les rivières.*

*Hélas, au long des siècles
Le temps imprime ses traces ;
Petit à petit, voici délaissée
La chapelle cachée au fond de la vallée*

*A la fin du dix-neuvième siècle,
Le promeneur restait tout triste.
La chapelle jadis si belle
N'avait plus aucun mur debout.*

*Les arbres poussaient dans les ruines,
Et les murs étaient renversés ;
La fontaine à l'eau si claire,
On ne la voyait plus sous la fange !*

*Un jour, monsieur le Maire,
Faisait un tour dans la campagne.
Son cœur bondit quand il voit
L'état où se trouvait la chapelle !*

*« Ô St Tremeur, mon saint bien-aimé,
Votre chapelle sera relevée !
Et je jure ici tout de suite,
Qu'elle sera encore plus belle qu'avant ! »*

*Et chacun se mit au travail
Suivant son métier, son état,
Et après quelques mois,
Les murs étaient relevés.*

*Alors le pardon fut célébré,
Le premier dimanche de mai, avec éclat
On y porta les plus belles bannières
Que la Bretagne avait dans ses églises !*

*Comme jadis les bâtisseurs :
Tailleur de pierres, maçon, et les autres
Travaillèrent vite et bien
Pour le plaisir des yeux.*

*Celui qui voit maintenant le site
Arrangé de la plus jolie façon,
Et la chapelle dans sa splendeur,
Dit : « O que c'est beau ! »*

-31- Pell 'zo, e parrez Gwirliskin,
'Us d'ar feunteun a gan lirzhin ,
El lec'hienn-mañ atav nevet,
Ur chapel gaer 'oa bet savet.

-32- An holl a zeue da bediñ
Ar sant karet dreist pep hini.
Amañ e rede ar c'hrasoù,
'Vel ma red an dour er stêrioù.

-33- Siwazh, a-hed ar c'hantvedoù
An amzer a voul e roudoù ;
Tamm-ha-tamm setu dilezet
Ar chapel en draonienn kuzhet.

-34- E fin an naontekvet kantved,
An tremener 'chome nec'het.
Ar chapel, gwechall-gozh, ken brav
N'he doa mui moger en e sav !

-35- Ar gwezh 'vounte er rivinoù,
Ha diskaret ar mogerioù ;
Ar feunteun, enni dour ken sklaer,
Dindan ar fank, mui n'he gweler !

-36- An Aotrou-Maer, oa un devezh
'C'h ober un droad war ar maez.
E galon 'ra ul lamm, pa wel
E peseurt stad oa ar chapel !


-37- « O Sant Tremeur, va sant karet,
Ho chapel deoc'h 'vo adsavet !
Ha touiñ 'ran amañ, raktal,
'Vo kaeroc'h c'hoazh eget gwechall ! »

-38- Ha pep hini da labourat
Hervez e vicher pe e stad ;
Ha goude un nebeut mizioù
Oa adsavet ar mogerioù.

-39- Neuze 'oa lidet ar pardon,
Sul kentañ mae, gant kalz a don !
Ha douget kaerañ bannieloù
En devoa Breizh 'n he ilizoù !

-40- E-giz ar saverien gwechall :
Piker-maen, mañsoner hag all,
O deus labouret prim ha mat
Evit dudi an daoulagad.

-41- Neb a wel al lec'hienn bremañ
Kempennet 'n ur stumm ar bravañ,
Hag ar chapel en he splannder,
A lavar : « A, na pegen kaer ! »



Prière :

*Monsieur St Tremeur béni,
Chacun de ceux qui ont travaillé
Pour rebâtir votre chapelle
Vous demande votre aide.*

*Ô St Tremeur, martyr glorieux,
Véritable ami, vrai témoin de Jésus,
Votre sang est semence de Chrétiens,
Nous vous prions, défendez-les.*

*Le monde, dans lequel nous vivons en ce jour
est cruel pour les enfants,
Ils sont maltraités en maints pays
Saint Tremeur, vous les garderez.*

*Comme les (saints) Enfants Innocents
Qu'Hérode arracha à leur mère,
Vous êtes dans la gloire des martyrs
Priez pour les bourreaux.*

*Vous que votre père a tué,
Aux parents, exaucez leur voeu.
Et mettez en eux l'Amour,
Pour bien élever leurs enfants.*

*Le feu de la guerre s'allume partout :
Le vent de la violence souffle déchaîné.
Demandez que souffle la brise
De la Paix, entre chaque pays, chaque homme.*

*Surtout, gardez la Bretagne, notre pays.
Et puisque votre nom est « Grande Victoire »,
Que reste forte la foi, la Paix
Puisqu'elles sont « frère et sœur » en Bretagne*

*Et faites que nous soyons reçus,
A l'heure où il nous faudra quitter le monde,
Vallée de chagrin, de malheur,
Au paradis, pays de la « Grande Victoire »*

*Gloire soit à la Trinité Sainte ,
Au Père, le Dieu de toute éternité,
Au Fils, le Roi des martyrs.
Et au Saint Esprit. Amen.*

PEDENN

- 42- Aotrou Sant Tremeur benniget,
Kement hini 'n deus labouret
Evit adsevel ho chapel
a c'houl diganeoc'h ho skoazell.
- 43- A Sant Tremeur, merzher klodus,
Gwir vignon, gwir dest da Jezuz,
Ho kwad a zo had kristenien,
Ni ho ped, deuit d'o difenn.
- 44- Ar bed, lec'h ma vevomp hirie,
'Zo kriz evit ar vugale
Gwallgaset int e meur a vro
Sant Tremeur, c'hwi o diwallo.
- 45- Evel ar Vugale Dinamm
Gant Herodez tennet d'o mamm,
C'hwi 'zo e klot ar verzherien,
Pedit evit ar vourevien.
- 46- C'hwi 'zo bet lazhet gant ho tad,
D'ar gerent, roit o mennad.
Ha lakit enno Karantez,
Da sevel mat o bugale.
- 47- Tan ar brezel a grog dre-holl :
Avel ar feulsted 'c'hwezh, diroll.
Goulennit ma c'hwezh aezenn
Ar Peoc'h etre pep bro, pep den.
- 48- Dreist-holl diwallit Breizh, hor bro.
Ha pa 'z eo « Trec'h Meur » hoc'h anv,
Ra chomo kreñv, ar feiz, ar yezh
Peogwir int breur ha c'hoar e Breizh.
- 49- Ha grit ma vimp degemeret,
D'an eur 'vo ret kuitaat ar bed,
Traonienn a c'hilac'har, a walleur,
Er Baradoz, bro an Trec'h-Meur.
- 50- Klot ra vo d'an Dreinded santel,
D'an Tad, an Doue trafadel,
D'ar Mab, Roue ar Verzherien.
Ha d'ar Spered Santel. Amen.



J.F. Sul ar Bleunioù 1998
Pabu e Bro-Dreger.

